



An hentoù-houarn

KLASK KELEIER

Evit respont d'ar goulennoù, klask ar respontoù war ar pajennoù merket.

	Sell ouzh ar bajenn
1. Gant peseurt skol eo bet savet Taboulin an hentoù-houarn?	1
2. E peseurt bloavezh eo bet digoret ar c'hentañ linenn-houarn evit ar veajourien e Bro Saoz?	6
3. E peseurt bloavezh eo bet digoret al linenn-houarn e Gwened?	4
4. Eus pelec'h e oa genidik Richard Trevithick hag en deus ijinet ar c'hentañ stlejerez?	6
5. E pelec'h e oa diazezet ar greizenn-renañ eus ar Rouedad breton?	7
6. Piv eo ar skrivagner a zispleg al labourioù bet kaset da benn etre Karaez ha Kastellin?	8
7. E pelec'h eo lec'hiet an tren <i>An Tire-Bouchon</i> ?	4
8. Penaos ober evit mont en tu all d'an hent-houarn?	3
9. Petra a ranker ober a-raok mont e-barzh an tren?	2
10. Petra zo bet graet gant an hentoù-houarn kozh e Kreiz Breizh?	7
11. Piv eo ar skrivagner a gont penaos e oa an tren er vro vigouden?	8
12. Peseurt beaj he deus graet skol Gwengamp?	1


Evit gellat respont gwir pe gaou, sell ouzh ar pajennoù merket.

	Gwir	Gaou	Sell ouzh ar bajenn
1. Klasket e vez kustumiñ an dud da implij ar c'harr en o buhez pemdeziek.			5
2. Tizh brasañ aotreet gant un tren zo 574 km an eur.			1
3. Er XVI ^{vet} kantved e veze implijet kirri hag a ruilhe war railhoù-koad.			6
4. Arabat e vefe muioc'h eget un hanter-devezhiad hent war velo evit tizhout an ti-gar tostañ.			7
5. An SNCF zo bet krouet e 1920.			1

Lenn skeudennoù

	Sell ouzh ar skeudennoù er bajenn
1. Pegement a CO2 a vez taolet en aer dre veajour gant an tren ?	5
2. Pet kilometr a c'hell ur c'harr-nij ober gant 1 c'hilogram a betrol ?	1
3. Dre belec'h e ranker tremen evit mont eus an Orient da Roazhon gant an tren ?	4
4. Penaos e veze kaset an dud betek an ti-gar e fin an XIX ^{vet} kantved ?	4
5. Peseurt diforc'h dilhad a oa etre tud kêr ha tud ar vro en Drinded-Karnag ?	7
6. Petra zo skrivet war an Trenioù Express Ranvroel ?	5
7. Petra a vez gwelet dindan an treuzelloù hentoù-houarn ?	8

Gerioù-kroaz



1. Hentoù evit an trenioù.
2. Ur gêr eus Aodoù-an-Arvor brudet evit he skipailh mell-droad.
3. Kêr prefeti ar Morbihan.
4. Pa vez dour o virviñ ez eus diouti.
5. War an uhel.
6. Etre daou venez.
7. An dud hag a zo o veajiñ.
8. Ur c'harr evit kas leun a dud asambles dre an hentoù.
9. Ar c'harr hag a sach ar wagonioù.
10. Un hent bihan war ar maezioù.
11. War an hent-houarn etre an treuzelloù.
12. Evit muzuliañ pegen buan ez aer.